



## HISTOR ADMIRABL

### DEMEUS AR BOUDEDEO,

*Pehini abaoe maro hor Zulver ne ra nemet bale  
nôs ha deiz ac'hann da fin ar bed, abalamour  
d'an affronteri an devoa bet en andret hor.  
Zalver Jesus-Christ, pehini, pa voa o vont  
d'ar maro, a falvezas dezàn disquiza var e  
stal, hac e teuas d'en rebuti evel eur scelerat.*

Var ton : *Güerz Santez Anna.*

---

**A** SISTANTET enorabl, tostait da glêvet  
**A** Ar vuez pitoyapla a voe biscoas er bed;  
An histor zo truezus demeus ar Boudedeo,  
**A** zo nôs-deiz o vale aboe hor Zalver maro.

Eus a dribu Nephtali, a guêr Jerusalem,  
Voa ganet Absarius, carguet a anathem;  
Dont a ras var ar bed-mâ en amzer Herodes,  
**A** felveas massacri Jesus, Mab ar Verc'hez.

Va zad a voa eurc'halve, va mam qemenerez,  
Hac a laboure en Templ da ober broderes;

## 2

Ha va c'herent am desqas da lenn leor al Lezen,  
Hac hini ar Biofetet iveau a dra certen.

Goude e voen demeet gant va c'herent anfin  
Da eur vreg sur ha prudant a dribu Benjamin,  
A bini'm boe tri buguel en amzer ma teuas  
Autrou Sant Yan Badezour d'anonç ar Messias.

Sant Yan a gonvertissas calz eus a bayanet  
Pere voa idolatret, caledet er pec'het:  
Dec mil den en un devez en deveus badeet,  
Me, va greg, va bugale e voamp bet o velet.

Va greg a lavaras din : Va fried emezi,  
Leqomp en em vadezi, enont è ar Messi;  
Ha me o respont dezi gant eun ear direspet:  
Na ni nac hor bugale ne vimp qet badeet.

Aben eun nebeut goude S. Yan voe dibennet  
Dreurz' roue Hérodès, eun den cruel meurbet,  
Ha ma teuas hor Zalver evit rën en e blaç;  
Hac a ras dre ar c'hanton calz a viraclou bras.

Clèvet e meus bet Jesus alies o sermon,  
Hep ne meus bet profitet eus e bredisication;  
Va-unan e voan presant p'en d'oa rassaziet  
Dec mil den gant pemp bara ha goudeze pesqet.

Me Boudedeo maleürus a velas c'hoas souden  
Jesus o ressuscita Lazar, breur Madalen,  
Ha güelet dibossed calz a dud possedet,  
Ha sivoas din pec'her bras ne meus tam profitet.

A e/  
 Aben eun nebeut goudé voe Jesus qemeret  
 Gant calz eus a judevien er jardin Olivet,  
 Ha condaonet gant Pilat da rancout da zouguen  
 Ar groas ponner ha mezus evit ar bœc'herien.

Pavoe ar groas achuet, d'hor Zalver voe samet,  
 Da vont da vénez Calvar da vea crucifiet :  
 O velet an dud o redec, me gneuer va buguel,  
 Ha me mont da dal an nôr pa yê én da vervel.

Cetu Jesus o trémen neuze abiou va zi,  
 Pehini en tal va stal a deu da reposi,  
 Ha me lavarat deàn gant eur gomz arrogant :  
 Qê alesse eus va stat, te zo eun den mechant.

Ganes òn dizenoret gant da iffronteri,  
 Pa qüelàn o reposi amàn e tal va zi :  
 Qerz alesse, den ingrat, cos sorcer milliguet,  
 Qerz alesse d'ar maro, pa c'heus he meritet.

Jesus a respontas din gant eur voez truezus :  
 Mont a ran da bartia, den fall, den maleürus.  
 Me reposo gant va Zad, te valeo bepret  
 Dre bêvar c'horn ar bed-mâ ac'han da fin ar bed.

Ia, te a valeo ac'han d'ar jujamant,  
 Hac er c'hoste deo d'am Zad am velo suramant  
 O varni ar bœc'herien pere vo condaonet  
 Da vont d'ar flamougries, arre just d'ar joaüstet.

Paglêvis comzou Jesus, vac'halon voe touchet,  
 Ha me' rîi va bugale en instant d'am pried.

Ma velis ar Veronic o sec'hi bisach Jesus,  
Ha chom en he mouchouer e boltret truezus.

Hep ellout' n'em arrêti e heuillis hor Zalver,  
Hac e velis va Jesus ha calz graguez santed;  
Ar bourrevien d'ar Verc'hez o deveus lavaret :  
Cetu amâ an tachou ma vo ho Mab staguet.

P'amboe güelethor Zalver o verval var ar groas,  
E creiz etre an daou laer carguet a boaniou bras,  
Ha me comanç va beach gant calz eus a anqen,  
O tont da laret adieu da guær Jerusalem.

Sònjit eta, Bretonet, peguement ac'hlae'har  
En deus ar Boudedeo bremâ var an douar !  
Ràncout qüittat e gartier, e vreg, e vngale,  
Hep qimiadi diouto, evit atao bale.

Pa en devoe baleet eun nombr a vlaveziou,  
Ec'h êruas en Egypt, pel bras demeus e vrô.  
Eno e mât ar Môr-Rus, elec'h m'oe tremenet  
Moyses gant pobl Doue, hep cavout drouc ebet.

Mont a ris eus ac'hane da enezen Candi,  
Elec'h emedi en noas an dud a zo enni ;  
Eno e velis eun tad o trec'hi a damou  
E vere'h evit sacrific da rîi d'o doueou.

Mont a ris da Malhodo, e pelec'h eus tud drol,  
Pere a ador Doue hac an diaoulou olj ;  
Pedi a réont Doue da gaout prosperite,  
Hac an diaoul a bedont ne rai qet drouc dèze.

Güelet e meus er Japon ur vam meurbet cruel,  
 Pini' deuas da laza, sivoas, he daou buguel.  
 Er vrô-ze ê permettet laza ar vugale  
 Pa n'o deus qet a vara o zud da rîe dêze.

Goude' qemeris an hent da vont d'an Enezi,  
 D'an Amerio, d'an Asi, ba neuze d'an Turqi.  
 Ar graguez eus ar vrô-ze a vale d'an arme,  
 Hac an ezac'h o deus soign demeus ar vugale.

Eno emedi ar c'his da laza ar botret,  
 Nemet unan dre famill na ve james miret.  
 Bez' o deus eur rouanez a ro comandamant  
 Da laza an oll botret, hep caout dè nep damant.

Er guær eus a Garniol eus ur c'his drol meurbet  
 Rac eno an dud yaouanc, pa vezont eureujet,  
 Er anco ar vreg yaouanc, nôs qenta he heured,  
 Mont da gousqet gant ar prinç, vit bea enoret.

Bet òn ebars en eur c'hoad hanvet Cisaria,  
 Elec'h ma eller bale cant lêo d'an nebeuta  
 Hep cavet dour da eva, na feunteun na rivier,  
 Ar pez zo goal incomod da oll dud ar c'hartier,

Monet a ris c'hoas pelloc'h, d'ar guær a Vosopa,  
 Pini zo eus he divoal eur prinç eus an drola :  
 Urvanden chaç ha merc'het en deus evit gardou,  
 Ha n'en deus qen soudarded evit difen e vrô.

Ac'hane' yis da eur guær zo hanvet Estopet,  
 Elec'h ma zeus serpentet ha loened vil meurbet

Zo ger teo ha corfun den sur ma vent muzuret,  
O deveus d'an nebeuta daou-uguenttroatad het.

Er spaç demeus a gant vloas ez òn bet o vale,  
Ha me éruout adare em brô hac em c'hontre :  
Allas ! maro voa va greg coulz ha va bugale,  
Ha den ebet eus va brô certen n'am anavee.

Neuze e teuis da Rom, ebars en Itali,  
En amzer-ze e voa calz eus a c'hlac'har enni ;  
Güelet'ris merzeria nombr bras a gristenien,  
En defot ne renoncent d'o feiz ha d'o lezen.

Me a vale var ar mór coulz ha var an douar,  
Ha me partial neuze evit ar Franç, brô rar !  
E Marseill, Bourdel, Paris, Niort, Naonet, Lyon ;  
Ac'hane da Vreiz-Izel, d'ar guær vrao a Roazon.

Güelet e meūs Montroulez ne voa nemet eur c'hood,  
Ha güelet Brest ha Qemper ebars en douar prat,  
Ha güelet ar goær a Is en he frosperite,  
Hac ar guær a Lexovi a meūs güelet ive.

Güelet emeus Breiz-Izelen coad ha meneziou,  
Ma zoat evel sovajet neuze ebars er vrô ;  
Me a vel calz a guériou er vrô-se batisset,  
A ra calz a chenchamant abaoue ma zòn bet.

Me vel ar guära Roazon eur guär gaer batisset,  
Dol, Güenet ha Sant-Malo, Dinan hac an Naonet,  
Sant-Brieck ha Landreguer, Lanion, Montroulez,  
Castel-Pol ha Lesneven ha Landerne iveau.

Arc'hæriou-zemeus güelet e coad hac e prajou  
Padéuis d'ober va beach quenta ebars er vrô;  
Cetu batisset Qemper, ha Brest ba Recouvranc,  
Qemperle, Moelan, Kerahes ebars en assuranc.

Anfin, paòn condaonet gant Doue da vale,  
Me zo bet en em gavet e creiz meur a arme;  
Canoliou ha fusuliou, clezeyou, sabrennou,  
Netra ne dê bet capapl da iei din ar maro.

Bet òn ebars e listri a zo bet perisset,  
Hac an dud a voa enne a meus güelet beuzet,  
Ha me hanvet Boudedeo n'em bije drouc ebet:  
Comzou Doue a râncou bea accomplisset.

Condaonet e zòn gantâ da chom var an douar;  
Comprendit oll christenien, emâ zo din glac'har!  
Va zourmanchou er bed-mâ biqen na èchuo  
Qen a deui Doue da varn ar beo hac ar maro.

Ar som eus a bemp goenec zo em godel bepret,  
James gant nepseurt clénvet mene dòn attaquet;  
Bet òn ebars en broyou elec'h m'oar vocen,  
Hepna zeus staguet ouzin naclénvet nac an qen.

Va boutou na va dillat james na uzont qet,  
Dre bermission Doue a meus bet offancet;  
Pedergüech e meus redet pêvar horn ar bed-mâ,  
Ha güelet e meus ive cálz chenchamant ennâ.

Bremâ e zòn comanceet da redec ar bempet,  
Hepne dòn ambarasset gant dibri na cousqet;

Güelet a meus bet broyou zo bet oll revinet,  
Ha calz demeus a guæriou gant ar gurun dêvet.

Ne meusqet calz amzer evit chom da barlant,  
Me a gred e ma va zreid vargore glaou ardant  
Nan, ne zeus nemet Doue a elfe discléria  
Arboaniou bras a zouffrân qerqent ma reposâ.

Pebes maleur è din-me bea bet rebutet  
Demeus a guichen va stal Jesus Salver ar bed  
Pa voa o vont d'ar maro, da zont da zisquiza,  
Ha me neuze dre valeur a zeugas d'e zispriza.

Emâ è ar maleur bras a meus var ar bed-mâ !  
Emòn atao o vale ouspen trivac'h cant vla,  
Ha c'hoas e rànqân bale ac'hân da fin ar bed :  
Pedit Doue evidòn, ma zin d'ar joaüstet.

FIN.